

Sinema e brezhoneg

Seveniñ : Per Ahlin, Lasse Persson hag Alija Jaworski

Diwar levrioù Inger ha Lasse Sandberg


Laban

an tasmant bihan



N'eo ket aes bezañ ur seblant pa vezer spontet gant an deñvalijenn !

O vevañ e-barzh ar c'hastell Milaon emañ ar priñs bihan Sotoni hag e re. E vignon gwellañ, Laban, a vev eno ivez, asambles gant tadig tasmant, mammig tasmant hag ar c'hoar vihan Labolina. Reizh pep tra neuze e-barzh ur c'hastell hantet, nemet... e vez spontet Laban, an tasmant bihan, gant an deñvelijenn ! Tennet eus istorioù brudet-mat e-mesk ar re yaouank e Sweden, e kont « Laban, an tasmant bihan », e c'hwec'h istor berr, bed hag aonoù ar re vihanañ.



6 film-bevaat e brezhoneg

Laban ne ra ket aon da zen

Noziñ a ra war ar c'hastell Milaon, hag o tommañ e vouezh emañ Tadig tasmant : youadennoù spontus a zeu dioutañ ! Evurus-bras e vefe Laban ma vefe kap d'ober kemend-all.

Da belec'h eo aet Labolina ?

Ur mailh eo Labolina, c'hoarig Laban, pa vez kaoz d'ober a bep seurt soniadoù. Met peurzebriñ he boued hep lousañ pep tra zo ur gont all. Ha pa c'houlenn he mamm ganti dont e-barzh ar gibell, aet diwar-wel !

Ur weladenn er c'hastell

Ken evurus evel ez eo ar rouanez o vevañ e-barzh ur c'hastell hantet gant tasmantoù gwir ken e ped unan eus he mignonezed da dremen un tamm amzer ennañ. Fellout a ra d'ar vignonez gwelet an tasmantoù-se a-raok krediñ zo dioute...

Un euzhvil, unan gwir !

D'un deiz evel ar re all emañ Laban hag ar priñs bihan Sotoni staliet e-barzh ar jardrin, o lenn ul levr e-lec'h ma zo kontet istorioù... euzhvillede... euzhvillede spontus da vat !

Millimina zo aet diwar-wel

Fuloret eo Labolina : aet eo he foupinell Millimina diwar-wel. Ha pa vez fuloret Labolina... e vez klevet he mouezh !

An Tad Nedeleg

Tostaat a ra koulz an Nedeleg evit annezidi ar c'hastell Milaon. A bep seurt a vez aozet gante, hast war an holl e teufe an Tad Nedeleg. War an holl... nemet unan.

